


8N3-2-013



KANTIKOU

EMIT

GOUELIOU NEDELEK



KEMPER
MOULLET E TI DE KERANGAL
1909

TAOLEN

Pajen.

1. Deut, va Zalver, va Doue.....	3
2. Ni hoc'h ador, Mabik Jezuz.....	5
3. E Bethleem eo ganet	6
4. Deomp holl, kristenien	7
5. Gant an holl Elez euruz.....	9
6. Hanter noz eo !.....	10
7. Da gärik Bethleem.....	11
8. Meuleudi.....	12
9. Var ar menez.....	13
10. Messaëär, Messaëär.....	15
11. Mabik Jezuz.....	15

Ton ar pevare kantik, p. 7 (1).

The musical notation consists of two staves of four-line music. The first staff begins with a sharp sign, followed by a whole note, a half note, a quarter note, another half note, a whole note, and a half note. The lyrics 'Deomp holl, kris-te-nien' are written below the notes. The second staff begins with a sharp sign, followed by a whole note, a half note, a quarter note, another half note, a whole note, and a half note. The lyrics 'da ve - let Ar bu - ge-' are written below the notes. The third staff begins with a sharp sign, followed by a whole note, a half note, a quarter note, another half note, a whole note, and a half note. The lyrics 'lik ne - vez ga - net; Guir Vab eo d'an Tad e-ter-' are written below the notes. The fourth staff begins with a sharp sign, followed by a whole note, a half note, a quarter note, another half note, a whole note, and a half note. The lyrics 'nel. Deomp d'hen a - do - ri, 'n he ga - vel.' are written below the notes.

(1) Eeskopti Sant-Briek ez euz eun ton eun tammik dishenvel.
Merket eo var leor kantikou an Aotrou Guitterel, n° 107, p. 157.

KANTIKOU

EVIT

GOUELIOU NEDELEK

KENTA KANTIK

Var-don : *Venez, divin Messie* (Tonion n° 72).

DISKAN :

*Deut, va Zalver, va Doue,
Da gass peb drouk pell diouzomp ;
O guir zourseen a vue,
Deut buhan davedomp.*

Ah ! diskennit ; hastit affo ; (1)
Ni c'hortoz abaoe pell zo ;
Hon diouallit dioc'h maro.
*Deut, va Zalver, va Doue,
Da gass peb drouk pell diouzomp ;
O guir zourseen a vue,
Deut buhan davedomp.*

Na zale'hit ket a zrouk pelloc'h ;
Ni gouez d'an daoulin dirazoc'h ;
Ni harp hon holl fizianz varnoch'.

(1) Affo : buhan.

An ifern gant he gounnar
 A zeu goassoc'h da stourm ouzomp.
 Diskennit var an douar,
 Deut buhan davedomp.

Hon huanad ra vo klevet :
 Ar madou kaer hon euz kollet
 Daoust ha ne vezint mui kavet ?
 Stank e tired hon daelou ;
 Va Doue, ma pardounit deomp,
 E vo fin d'hon ankeniou :
 Deut buhan davedomp.

Eur vech ma vefot diskennet,
 Ni velo an ifern klozet,
 Hag ar baradoz digoret.
 Ni c'hortoz hed an amzer ;
 An Ee ho peuz græt evidomp ;
 D'ho ker e rankit del'her :
 Deut buhan davedomp.

Grit ma c'hellimp holl assamblez
 Kana eun deiz, en ho palez,
 Hag ho kloar hag ho karantez.
 Setu ar guir eurusted
 Zo a-viskoaz preparet deomp.
 Eun errez deomp e rofet,
 En eur zont davedomp.

J. B.

EIL GANTIK (1)

Var don : *Peger kaer ez eo Mamm Jezuz.*

DISKAN :

*Ni hoc'h ador, Mabik Jezuz,
 Mabik dous ha karantezuz,
 Doue meurbed madelezuz.*

*Mabik Jezuz, e kreiz an noz,
 C'houi a zilez ar baradoz,
 'Vit dont en hon touez henoz.*

*Mabik Jezuz, Doue-Bugel,
 Ra vezo kluuar an avel
 En noz-man, en dro d'ho kavel !*

*Mabik Jezuz, dre an envou
 Eléd a gan deoc'h kantikou...
 Perag 'glevan-me ho klemmou ?*

*Mabik Jezuz, me oar ervad
 Perag e vouel ho taoülagad ?
 Hor pec'hed 'ra deoc'h kalonad !*

*Mabik Jezuz, evit bepred
 O me a dro kein d'ar pec'hed.
 Va c'halon deoc'h zo gounezet.*

*Mabik Jezuz, hed va buez,
 Me a veulo ho madelez ;
 Ra varyin en ho karantez !*

(1) Tennet diwar *Feiz ha Breiz* koz, 23 a viz Kerzu
 1876.

TREDE KANTIK ⁽¹⁾

(Evit an Ton : Cfr *Variae preces Solesmes*, p. 72.)

E Bethleem eo ganet, alleluia,
Jezuz hor Zalver beniget, alleluia, alleluia.

DISKAN :

*Gant laouenidigez
Meulomp oll Jezuz hor Zalver
En eur c'chantik nevez.*

Guir Vab Doue en em c'hreat den, alleluia,
A zo kousket etre daou loen, alleluia, allel.

Souzezi rafac'h a dra zur, alleluia,
O velet Doue krouadur, alleluia, alleluia.

He-unan e c'houarn ar bed, alleluia,
Ha gant he vamm e vez douget, alleluia, allel.

Dont a ra 'n Elez euz an Ee, alleluia,
Da velet er c'hraou Mab Doue, alleluia, allel.

Oll en eur c'chantik dudiuiz, alleluia,
E veulont a-unan Jezuz, alleluia, alleluia.

Gervel a reont ar Bastored, alleluia,
Da velet ho Zalver ganet, alleluia, alleluia.

Deuz Saba e teu tri Roue, alleluia,
Da stoui dirag ho Doue, alleluia, alleluia.

(1) *Feiz ha Breiz*, Nov.-Déc. 1902.

Da Jezuz evidomp ken paour, alleluia,
E roont ezanz, myr hag aour, alleluia, allel.

Evit diskuez dre gement-ze, alleluia,
Eo guir Doue, den ha roue, alleluia, alleluia.

Mab Doue zo e guirionez, alleluia,
Mab da Vari atao guerc'hez, alleluia, alleluia.

'Vit hor prena ni pec'herien, alleluia,
Eo he-unan en em c'hreat den, alleluia, allel.

Oll eta, er gôuel kaer-ma, alleluia,
Meulomp Doue heb ehana, alleluia, alleluia.

Gloar da dri Ferson an Dreinded, alleluia,
Beteg ha goude fin ar bed, alleluia, alleluia.

PEVARE KANTIK

Var. don : *Jesu, Redemptor.* (Huelloc'h, p. 2.)
pe : *Jesu, dulcis memoria.*

DISKAN :

*Deomp holl, kristenien, da velet
Ar bugelik nevez-ganet ;
Guir Vab eo d'an Tad éternel,
Deomp d'hen adori' n he gavel.*

O pebez kelou a joa !
E Bethleem 'kreiz an noz-ma,
E Bethleem eo bêt ganet
Jezuz hor Zalver beniget.

Eno, gant ar Verc'hez Vari,
Eo bet ganet evidomp-ni.
Nag hen zo koant ha grasiuz !
Nag hen zo humbl ha gouzanvuz !

He gorf tener zo mailluret ;
'N eur manjouer eo gourvezet ;
Gourvezet var eun dornad foenn,
Tre eun azen hag eun ejen.

Diskennet eo leun a druez,
Da zigas deomp ar guir vuez.
Lakomp da dalvout he c'hassou
Prenet dre gement a boaniou.

Kanomp Nouel da Vab Doue
Henoz diskennet euz an Ee.
Holl, a-unan gant an Elez,
Meulomp, meulomp he vadelez.

A benn poent ar gommunion,
Guerc'hez, preparit va c'halon.
Pa 'z in da reseo ho Mabik,
Roit d'in ho kalon birvidik.

Araok ma tenot davedoun,
Mabik Jezuz, lakit ennoun
Purete an Elez sanctel,
Zo en d'rō deoc'h stouet izel.

ENNOUN c'hoaz lakit, o Jezuz,
Eur guir fizianz, eur feiz nerzuz :
Roit d'in fizianz ar Bastored
Ha feiz nerzuz ar Rouaned.

J. B.

PEMPED KANTIK

Ton : *Kasset e voue gant Doue* (Toniou n° 73).

DISKAN :

Gant an holl Elez euruz
Unanomp hor mouzeiouz,
Kanomp d'ar Mabik Jezuz
Hor-c'haera kantikou.
Myster he C'hinivelez'
Da Zoue a ro gloar,
Ha digas a ra iveauz
Ar peoc'h var an douar.

O burzud a garantez !
Mab Doue he unan
Evit hor zilividigez
Zo deut paouer kez bihan.
Red eo e ve hor ene
Eun dra a briz huel,
P'e guir 'vidomp eun Doue
A zisken ken izel.

'N eur zizenti ouz Doue,
Hon tad kenta, siouaz !
Hen doa var he vugale
Tennet malheuriou braz.
Jezuz 'n he C'hinivelez
A velomp er c'hountrol
Dre nerz he zeftidigez
Oc'h oher vad d'an holl.

Dre garet re ar madou,
An dud oa 'n em gollet.
Re stag oa ho c'halonou.
Ouan an holl draou krouet.
Jezuz 'n he C'hinivelez,
Da rei deomp eur gentel,
Kreiz ar vrassa paouentez
A fell dezhan gentel.

Azalek ma z-oc'h ganet;
Perag iveauz, Jezuz,
Perag ho peuz-hu choažet
Eur vuez ker poaniz ?
Evit redeompdagoupreñ
Ne c'hell hon eneou
Nemet dre ar binijen
Tizout bro an envou.

Jezuz, me vel an daelou
Var ho pizaj tener.
Siouaz ! dre va fec'hejou.
Oun betkriz 'n hokenver.
Sec'hit, mabik beniget,
Sec'hit ho taoulagad,
Rag,a-vremau,d'arpec'hed
Me dro kein evit mad.

J. B.

CHUEC'HVED KANTIK (1)

Var don : *Kavet emeuz ar peoc'h.*

Hanter noz eo ! Deut eo ar momet sантel !
An Den-Doue a zisken davedomp.
Lemel a rai ar pec'hed orijinel ;
Kounnar he Dad vo troët divarnomp.

DISKAN :

*Gloar d'Hor Zalver t En noz-ma ken burzuduz,
Ra vo dre holl meulet he drugarez !
Var hon daoulin, kanomp gant eur vouez, nerzuz :
Nouel ! Nouel da Vabik ar Verc'hez ! (bis.)*

Ra zeui, ennomp, ar feiz gant he sklerijen
Da ziskouez deomp kavel an Den-Doue,
Egiz ma oue guechall, gant eur stereden,
Béteg enhhan kasset an tri Roue.

Tud gallouduz, lorc'h ennoc'h gant ho madou,
Roue ar bed en eur c'hraou zo ganet !
Tostait outhan da glevet he genteliou,
Hag e reot fae var an holl draou krouet.

(1) Great a-nevez var batrom ar c'hanzik : *Minuit ! chretiens.* An ton gallek, ker brao gant komzou gallek, ne ja ket koulz e brezonek. Choazet zo bet eta kentoc'h eun ton all anavezet ha karet gant an holl. Ma vez c'hoant koulzkoude, e vez gellet miret an ton gallek, gant ma vez great pozioù, koubladou eiz linen.

Gant Hor Zalver hor chadennou zo torret ;
Breman omp libr ; digor eo deomp an Ee..
Eleac'h beza sklavourien d'an drouk-spered,
Breman ez omp bugale da Zoue.

Poaniomp, poaniomp da ziskouez d'ar Bugelik
Hor c'harantez, hon anaoudegez vad.
Lavaromp holl stouët dirag he graouik :
Kentoc'h mervel eget dont d'ho kuitât !

J. B.

SEIZVED KANTIK

An Adeste fideles.

Var an ton latin.

Da gärik Bethleem diredit, kristenien ;
Diredit heb dale ; sellit laouen
Roue an Elez
Ganet gant ar Verc'hez.

DISKAN :

*Deuit holl, deuit d'hen adori (bis),
Ha da ginnig dezhan mil meuleudi.*

Setu ar bastored o kuitât ho denved ;
Gant Elez davethan int bet galvet.

Davethan iveau
Redomp gant levenez. Diskan.

Deomp eta ; ni velo Mab an Tad eternel ;
Kemeret 'neuz 'vidomp ferm eur bugel.

En he vaillrou
E velimp hon Aotrou. *Diskan.*

P'e guir eo evidomp ganet er baourentez,
Holl dezhan diskouezomp hor c'harantez.

D'hor guella mignoun
'Rankomp rei hor c'haloun. J. B.

EIZVED KANTIK

Meuleudi.

Var don : *Meulomp holl.*

Kanomp holl meuleudi } bis.
Da Jezuz ha da Vari. } bis.

1. Mab Doue, euz an envou,
Dre he c'chinivelez,
A zigas levenez
Ha peoch d'an holl galonou.
2. Guelet a recomp 'n he gichen
Jozeph-hag ar Verc'hiez ;
Guelet 'reomp an Elez
En dro dezhan a vanden.
3. Ar Bastored 'zeu prestik
D'ar c'hraou d'hen adori,
Ha dezhzo, gant dudi,
Mari 'ziskouez he Mabik.
4. Kinnig a reont da Jezuz
Ho frezanchou dister ;
Jezuz ho digemer
Gant eur-mous'hwarz duduiz.

5. Gant an Elez beniget,
Gant Jozeph ha Mari,
Kanomp mil meuleudi
D'hor Zalver nevez-ganet.

6. Heb dale, an tri Roue,
Diredet a bell bro,
A zeu ive d'ho zro,
Da glask ar Bugel-Doue.

7. An tri Roue a ginnig,
Gant feiz ha gant doujanz
Aour ha myr hag ezanz
Da henori ar Mabik.

8. Kinnigomp d'he vadelez
Gant ezanz hor peden,
Myr eur guir binijen,
Dreist holl ; aour ar garantez.

J. B.

NAVED KANTIK

Var ar Menez.

Ton : *O Vierge, fontaine, rocher.* (Kantik Lourd.)

Var ar menez ar Bastored,
A greiz diouall ho denvedigou,
Souden en noz sklerijennet
Ho deuz klevet e bar an envou :

Nouel, Nouel, Nouel da Jezus. (bis)

Aberz Done eur burzud braz
Var an douar a zo c'hoarvezet ;
Hag an Elez a respontaz :
Eur Zalver evidoc'h zo ganet.

Hag ar Bastored etrezho
An eil d'egile a lavare :
Kerzomp, brema ni a velo
Hor Zalver, hor Mestr hag hor Roué.

Selaouit oll, eme an El,
It da Vethleem, da gear Dayid ;
Eno e kafot eur bugel
D'ezhan a greiz kalon lavarit :

En eur c'hraou digor d'an amzer,
Ha var eun tamik plouz astennet
Eno e veljont ar Zalver,
Ar bugelik nevez mailluret.

Evel ar Bastored sentuz
D'an Elez o deuz ho c'helennet,
Ni hoc'h ador, Mabik Jezuz,
Epad an nozvez-ma benniget.

Evel guechall bolz an envou,
An Iliz a zo sklerijennet ;
Kinigomp oll hor c'halonou
D'hor Mabik Jezuz muia karet.

Mabik Jezuz hor guir Zalver
Brema var an douar diskennet,
Er Zakramant euz an Aoter
Ra viot da viken adoret.

Mabik Jezuz, o diskennit
Dre nerz ho Sakramant adoret ;
Diskennit ennomp, ha mirit
Na vezimp taget gant ar pec'hed.

Pa deui eyidomp ar maro,
Hon digemerit gant karantez,
Ha da virviken ni gano
En ho Paradoz gant an Elez. H. du R.

DEKVED KANTIK Messaër, Messaër.

Var don : Berger, berger.

Messaër, Messaër, livirit, ne velit-hu ket ? (bis)

En-eur velet ar c'hraouik dister
Va c'haloun baour a lamim em c'hereiz. } bis

Ia, setu aze ar c'hraou dister

A guz eun Doue en he greiz.

Sonj ho peuz deuz komzou an Elez ?

Hag hi oa kaer ha dudiuz !

Int a gane : e bar an Envou gloar,

Gloar da Zouë mestr holl-c'halouduz. (bis)

Messaër, Messaër, ia e Bethleem omp digouezet ; (bis)

Deomp buhan da velet ar Zalver } bis

A ro Doue d'he bobl direiz.

Ia setu aze ar c'hraou dister

A guz eun Doue en he greiz.

Strafullet oll oan var ar menez

Pa veliz ho drempou skeduz

Int a gane : ar peoc'h vo var an douar.

D'an holl dud eün a galoun ha sentuz. (bis) B. C.

UNNEKVED KANTIK

Mabik Jezuz.

Ton : O Vierge, fontaine et rocher (Kantik Lourd).

DISKAN :

Mabik Jezuz, ô ve c'harantez,
Renit, renit em c'halon hemdez !

'Tal ho kavel, Mabik Jezuz. Peoc'h ha levenez am bezo
Na dous eo kana gant an Elez. Keit ma renfot, Jezuz, em c'halon ;
Gloar en Ee d'an Oll-C'hallouduz, E va ene keit ma pado
Ha d'an dud vad peoc'h ha levenez ! Ar garantez 'peuz bet evidon.

Nhor c'halonou dridomp gant joar!
Kenavo deoc'h, glae'h ar hag anken!
Peurc'hiraet eo ar buzud brassa :
Unanet eo. Donec gant an den.

An ifern a iud gant kounnar,
An douar a zrid gant levenez,
O klevet ar c'helou dispar
Kasset euz an Ee gant an Elez :

« Gant eo deoc'h, e kær David,
Ar Zalver a c'hortozit keit-so :
Mab'Doue eo, hen adorit !
Bardoz zo da neb her c'haro,

En eur c'hirouez tóuez al loened,
Gant lienach paour vit malluron,
Var eun dommick plouz kousket,
C'houi gavo Mab'Doue hon Aotrou.

Kuiteet hen deuz bar an Envou.
Evit savefei ar bec'herien,
'N em westlet eo d'an oll boaniou
Evit prena eurusted d'an den.

Dalek kavel kraouik Bethleem
Betez kroaz kalet menez Kalyvar,
Jezuz 'c'houzan vo eb 'n em gleñ
Vit ar bec'herien poaniou dispar.

Vo ket peadra kement-ze
Vit diskuez d'an dud ho garantez;
Korf, goad, ene, divimite
'N em roi dezhio da yagadurez !

Var ho aoteriou, deiz ha noz,
Kuzet dindan ar spes a varz
Jomimo-bepred ouz ho górtoz :
Genel 'n ho c'halon vo he oll joa ! »

Evit eur garantez ker bras
Penoz diskuez hon anaoudégez,
En Ee, Jezuz, ho karimp c'hoaz,
Anez ve ber kant mil bloaz buez.

Da ginnig deoc'h 'vel donezon
N'or heuz aour, ezzan na myr ive,
N'hellom kinnig' met hor c'halon;
He digemerit, o va, Douté !

Siouaz ! hon c'halonik zo paouz,
'Vel kraouik Bethleem diranvet ;
Mez bolontez vad a dalv aour
Da neb a fell dézhan ho karet.

Plijet ganeoc'h, Mabik Jezuz,
Ober eun aoter deuz hor c'halon ;
Tost deoc'h hebiken ez'omp euruz,
'Vel n'oa biskoz rone var he dron.

Rag neuze 'kreiz hon oll boaniou,
Ni gan velato gant levenez :
Na dous eo karet hon Aotrou,
Evel in hér char en Ee an Elez !

Ia sur, deoc'hui, Mabik Jezuz,
Ni fell deomp oll bezw da viken !
Kenavo ita did, bed frompluz !
Da Jezuz omp, da Jezuz hebiken.

Da Jezuz omp braz ha bilan,
He c'hourc'h hemefinou dous ha san,
A heullimp bepred er bed man tel
Hag hor bo bardoz eternel.

Eno e tal ho trou, Jezuz,
Kanimp da viken gant an Elez :
Gloar, enor d'an Oll-C'hallouduz,
Had'an dud vad peoc'h halevenez !

H. L.

Imprimatur :

Corisopitti, die 14. Novembris 1908

A. COGNEAU, Vic. gén.